

# EJOU AR GAN

## Kousk, Breiz-Izel !

An heol a zo kuzet, sethu achi an de,  
Me glev ar c'hloch o tintal an Ave :  
Kousk, kousk  
Breiz-Izel, bro dispar,  
Sethu an noz o tond var an douar,  
Kousk,  
Breiz-Izel, bro ken mad  
Trouw ar mor don a zav d'az luskellat.  
Chouez vad an ed en bleun hag al lann alaouret  
Var ar meaziou gant ar gliz noz a red  
Kousk, etc.  
Ar Vesaërien a gan o testum o loned  
Gwerziou Breiz-Izel ne n'int ket c'hoaz kollet  
Kousk, etc.  
En traoniennou didrouz me glev kan an eostik,  
Telenner noz, sonit flour ha dousik.  
Kousk, etc.  
Uz da Vreiz o skedi an nenvy steredennet  
A lar zeuz eun Doue euz hor c'haret.  
Kousk, etc.  
An neb a chouez bemdez a choune e repoz  
D'an dud vad Doue en deuz great an noz.  
Kousk, etc.  
Arvor, o douar Sakr, a greiz kalon m'ho kar,  
Bro all ken kaer n'euz ket var an douar !  
Kousk, kousk, etc.

BLEI LANNVAU.

## DEUT E-LEIZ !

VAR DON An Dukez Anna.

Ni zo deut da gana hirie  
Vel en amzer goz,  
Pa oa uz d'ar Vro dorn Doue  
O rei e vennoz ;  
D'an amzer ma oa Breiz-Izel  
Eur vro gaer hag eur vro santed :  
Deut e-leiz  
Barz en Ti kanerien Breiz.  
  
Ni hon beuz savet an Ti-man  
E kreiz an dachen,  
N'euz moger 'bed en dro d'eau  
Hag evit toen  
En deuz bolz sklerius an nenvou  
Pe ar gwez pe ar gwabrennou :  
Deut e-leiz  
Barz en Ti kanerien Breiz.  
  
Didosteit 'ta braz ha bihan  
Na ganomp ket evid arc'hant,  
Kenneubeud 'vid aour ;  
Ni a ro hor poan, hon amzer  
Vit Breiz-Izel hag he brazzer !  
Deut e-leiz,  
Barz en Ti kanerien Breiz.  
  
En Ti-ma e kleofet meuli  
Pez a dle sevel  
An eneou mad en dudi  
Vel war diou askel ;  
Ar fallagriez diskinnlet

Eno na zao netra en erven  
Med kanab, segal hag ed-du,  
Eno na ve bleun med er spern-gwen,  
El lann, er balan, er bruk ru,  
Ma, n'euz forz, tud kaez, gant bleun ar mene,  
Me vije seder, laouen evel-t-é,  
Sard ha iè korf hag ene  
Gant bleun koant ar mene.

Eno, lec'h an holl drouz a glever  
Eo kloch' braz ar barroz en brall,  
Garm ar c'horn-boud, mouez yoan ar mesaër,  
Ar biniou o son da zansal :  
Ma, eno tud kaez, demeuz eur sort son  
Me chome da zilaou a greiz ma c'halon,  
N'o ket evidon er bed  
Muzik muioch' karet.

Eno e-kreiz ar goany aliez  
Me 'meuz bet poaniou diniver,  
Nec'hant, riou, naon, ha dienez,  
Glac'hag hirvoud leiz ma ler !  
Ma, n'euz forz tud kaez, e-kreiz ar goany kri  
Me zante ma c'halon meur wech o virvi  
O virvi a garante  
Despet d'am faourente !

Eno c'hoaz, en dro d'an tantajou  
En nozvejou ar souben-laez,  
Meuz bet kanet rimoustadennou  
Laket c'hoarz ha gouel aliez !  
Ha neblec'h, tud kaez, n'on bet 'n em dommet  
Vel deuz al lannou lec'h on bet savet !  
Eno, kreiz ma faourente,  
Em bro ar garante !

Me c'houlen echui ma deiou  
Pa na vin ken mad da netra  
Eno, pell pell deuz trouz ar c'heriou  
Ha brazoni ar bed paour-ma.  
Eno c'hoaz tud kaez, lec'h ma ren bepred  
Gant giziou hon zadou, an evurusted,  
Ar peoc'h hag ar garante  
Em bro ar baourente !

Brema, tud kaez, o pa vin galvet  
Da vond lec'h eo eat hon zud koz,  
Grit, 'nhan Doue, ma vin douaret  
En bered vihan ar barroz !  
Eno c'hoaz e lec'h drito ma c'halon  
O kleved biniou ar mesaër o son,  
Hag an holl mouzeiou karet  
Deuz ma Bro binniget !

CHARLEZ ROLLAND.

## Damb arnehe !

(lez Gwened)

I  
Chileuet tud jaquank, tud koh ha bugale ;  
Peizanted, tuchentil, labourizion eûeII  
Ha hui gleüou ur son a néüe so saüet,  
Aveit dihuen hur Bro hag hun lez beniget.III  
Arriü e en amzer aveit omb Bretoned  
De seul hun penneau hemb doujein den erbet.IV  
Pel erhoalh e omp bet goapeit ha disprizet :  
Kommans e bramh chuiiaïn dre fach bout gallegat